

(f. 237)

ar Person barvek.

Eun eskop deus a Franss, deus a galite bras  
e dond d'ober e visit eur vech en eum tromplas.

eur person a velas haeg a voa rust a vin,  
mez baro en devoa evel eur c'habussin.

ar person a nend all a voa bizachet mad  
tal huel, a fri kaer, a lem e zaoulagad.

an eskop pa er goëlas a Komanss de c'hataki  
a balamour de varo a de inkieta

— Doc'h a belech, emean, na doc'h a pe ganton  
e zout te deud er vro man evid beza person.

Haeg eun heritik oc'h-hu, deus an heritiket  
Pe eur beleg benag doc'h ar schismatiket.

— Otrou a me, ar Person (1) a drugare Doue  
Ne don en eb feçon an eil nag e quile.

Me gred eur berson mad, Katolik koulz a c'houi  
A ne ouzon ket ferag en duit dam attaki

— ho paro e me ar brelat a kavan diffeson  
a ne apparfent (2) ket deus bisach eur person.  
a troheti pe me a reio deoc'h ober.

(f. 238)

Ne ouzoc'h ket marteze doc'h fiou o c'heus affer

— O barion zo roet dar goasset

(1).— Lire: "eme ar Person,".

(2).— Peut-être faut-il lire un s (f) au lieu d'un f.

164

evid o distinga doc'h ar fumelesset  
 a me ne fel ket din beza fumelized  
 na troha va baro hag hi dija grizet  
 Pa neket ordrenet din pelec'h monet.

Ne ouffen ket ober vel evid mond da Versaill  
 Da velet ar c'hastel  
 enon velin ar Roue en tremen ag er sorti  
 Pelec'h benag e zai a pa vo e dribi  
 Biskoas non bet enon ag e klevan konta  
 nan eus pales er bed komparaket ontan.

(Moris Follezour 22 janv : 1851.)